


Ma - ri hor Mam e hars ar mor a zo e vi -domp

eun ten- zor. Bur- zu - dou a ra bep ma - re a man e -

vit e bu - ga - le.



## Diskan:

{ Mari, hor Mam e hars ar mor,  
 { A zo evidomp eun tenzor  
 { Burzudou a ra bep mare  
 { Aman evit e bugale.

Etre Penmarc'h ha Beg ar Haz  
 Zo savet e pleg ar mor braz  
 Eur chapelig eus ar brava  
 Evidoc'h, Intron Varia!

Chapel Penhors eo e hano.  
 Aman gwir zikour ho pezo,  
 Evit ho korf hag oc'h ene  
 Digant ar Verc'ez, Mam Doue.

D'an eiz euz a viz Gwengolo  
 Ema ar pardon bras eno:  
 Treuzou an Iliz zo uzet  
 Gant boutou ar belerined.

Hon tadou koz e peb amzer  
 A gave aman ho mam ger;  
 - Enoc'h, Mari a oll viskoaz  
 O doa lakeet eur fianz vras.

En o foan hag en o enkrez  
 D'ho kaout e teuent, o Gwerc'hez  
 Ha sikour o dije breped  
 Diganeoc'h, Mam oll remed.

Gwerc'hez Vari, Mam da Zoue  
 Ni zo ive ho pugale:  
 Karet oc'h bet gant hon tadou  
 Ha na ro d'eoc'h hor c'halonou.

Er bed-ma, allas! reuzendik  
 Ez omp oll paour ha pinvidik;  
 Gant an anken hag ar c'hlenved  
 Ez omp oll bep mare krignet.

Hor c'horf en deus e glenjejou  
 Hag hon ene e c'houliau:  
 Hor mam a gav bepred ive  
 Remed d'an eil ha d'egile.

Redomp eta gant levenez  
 Da gaout Mari hor rouanez;  
 He galloud a zo heb he far  
 War ar mor ha war an douar.